

An Arzhanaou d'an 28/08/2023


## PRIZ AR VUGALE 2024

Da skolaerien skolioù Diwan  
ha klasoù divyezhek Breizh

Demat d'an holl,

Ar bloaz-mañ, ekologiezh da gentañ penn, ur bern levrioù a chom e kartoñsoù KVB.

Ha neuze dibabet e oa bet gant Kvb ha Fea kinnig deoc'h pevar zidl a zo bet Priz ar vugale en amzer dremenet, hag a vo marc'hadmatoc'h evidoc'h, gwelloc'h evit an en dro, ha ken plijus evit ar vugale. Istorioù leun a faltazi, gant daou aerouant disheñvel-tre, unan speredek-kenañ, hag unan all, bihan, desavet dre guzh gant daou vugel. Den Bleiz, skrivet gant ur skolajiad Pevare klas Diwan Kemper, a gont ur c'hoari video a echu fall. Gant Tadig eizh brec'h eo planedenn ur mab a glask sachañ evezh e dad re sammet gant e labour...



**8 € e vo priz an dastumad** , ar frejoù-kas a vo war ho kont.

Ur fakturenn a vo kaset deoc'h goude. Ur wech graet ho soñj, leugnit ha kasit ar follenn-enskrivañ da-heul asambles gant ar chekenn da :

**Priz ar Vugale - Keit Vimp Bev – 22 Grand' Rue – 29520 Laz**

Enrollet e vo pep levr penn da benn, a c'heller selaou war lec'hienn Kvb ha Tv Bro Kemperle, aes da bellgargañ.

Pediñ ar skrivagnerien a c'hellit ober, ha degemer lid ar Priz e miz Even 2024 ivez.

Gellout a rit kemer al levrioù e Laz adalek fin miz Eost, pe e-pad saloñs Karaez, gant ma vo bet kaset an urzh-prenañ a-raok ar 25/10, pe e Laz war eeun a-raok pe goude an distro-skol ma fell deoc'h.

Gant ma vo plijet ho lennerien yaouank ha lakaet war hent al lenn e brezhoneg.

Joa deoc'h,

Fanny Chauffin, prezidantez *féa*  
ha skipailh Keit Vimp Bev

# FOLLENN ENSKRIVAÑ PRIZ AR VUGALE 2024

Skol : .....

Skolaer(ez) e karg : .....

Postel : ..... @ ..... Pellgomz : .....

Chomlec'h : .....

Kod post : ..... Kêr : .....

Er skol e vo ..... bugel o kemer perzh, rannet evel-mañ :

..... e CE2

..... e CM1

..... e CM2

Urzhiadiñ a reomp UN NEBEUD DASTUMADOÙ evit ar c'hlas : 8 euro x ..... = ..... euro

Urzhiadiñ a reomp UN DASTUMAD EVIT PEP BUGEL : 8 euro x ..... = ..... euro

Degas al levrioù :

Dont a rin da gerc'hat va levrioù e Gouel al levrioù e Karaez (28-29/10)

..... (anv) a c'hello dont da gerc'hat al levrioù evidomp

(H)E niverenn bgz : .....

Postit al levrioù deomp mar-pli

Graet d'a ..... E .....

Sinadur :